

(56)

AR SPILHEN.

— par l'abbé Le Roux,
curé de Plouzéré avant la Révolution +



E MONTROULEZ,
Eus a Imprimiri V. GUILMER.



AR SPILHEN.

Ya, gat eul lomic guin guen
 Bete anter va gueren,
 Var becg eur spilhen e rafen
 Eur son quëit hac eur goalen :
 Chetu va lomic guin evet,
 Chetu va son comancet.

C'hui oll pere a ra spilhou
 Hac ho rencq a gouchadou;
 C'hui oll pere dre ar foariou
 A ren, a vers, a bren spilhou;
 Sicour; c'hoant a so e rafen
 Eur son var becg eur spilhen.

[4]

Pourmenit dre an oll broyou,
 E peb leac'h eus spilhou ;
 Spilhou aour , spilhou arc'hant ,
 Spilhou var alc'huet livet coant ,
 Ha spilhou bras , ha spilhou crenn ,
 Spilhou du , spilhou melen .

E peb stad hac e peb amser
 Ar spilhou so necesser :
 D'ar varquises , d'ar rouanes ,
 D'ar baoures-qes artisanes ;
 En nos qer couls has en deiz ,
 Er c'hosni , er yaouancjis .

Pa za Jannedic d'an dansou
 Ractal e clasq e spilhou :
 En e c'huef e laca peder ,
 Ha têir en e mouchouer ;
 En e brennidien e laca
 Spilhou , spilhou hep conta .

Avechou oll labour an den
 A zepant diout eur spilhen :
 En ho taouarn pa vez un dren
 E carfarzh e lamet souden ;
 Gat petra e lamet an dren ?
 Nemet gat becg eur spilhen .

[5]

Carguet ar c'hornad ha tanet,
 Mar stourm chetu c'hui nec'het ;
 Ma ne ro avel ho piben
 E chachit var nisi e ven ;
 Petra ho lamo a anquen ?
 Nemet beguicq eur spilhen.

Eur charter en eur greyen
 Pe scoliet en eur voulzen ;
 Gat petra en em sicourq
 Na gat petra ec'h avanso
 Hac e guesecq, hac e oenn ?
 Nemet gat becq eur spilhen.

Deac'h e velis eur buguel
 O clasq chocat biguerniel :
 Paotricq, dell, qemer eur spilhen
 Ha goude-ze gra evellen.
 Holla ! e me ar paot laouen,
 Vive beguicq ho spilhen !

Na glasquit qet taboulinou
 Da sevel paotredigou,
 Na da sevel scolaerien ;
 Chetu amâ ar guir voyen :
 Plantit sioul en ho fesqen
 Beguicq, beguicq eur spilhen.

[6]

Eun den o vont da besqeta
 A ve faë bras ganta
 Clasq eur fusuilh, pe eur sabren :
 Petra a clasco-ta va den ?
 Eur hrenvicg, pe eur guellienen
 Laqet var becg eur spilhen.

Mar chom gat an dud avizion
 Ho buez, hac ho madou,
 A guemen-ze int dleourien
 Aliez da vecg eur spilhen,
 Ha chetu amà ar breuven;
 Vive beguicg va spilhen.

En nos ataquet ty eun den,
 E qemer eur bistolen.
 Chat : stouvet e toul an oalet ;
 En distouva eta so ret :
 Biжен er meas ne da e denn
 Nemet gat becg eur spilhen.

Eur veach m'en deus gat eur spilhen
 Distouvet toul ar c'hreunnen,
 Ec'h avans hardi, hac e tenn ;.....
 Al laëron spontet en em denn :
 E vuez-ta hac e voyen
 A dle da vecg eur spilhen.

[7]

Evel-ze ne veler archer,
 Fusilher na canolier
 N'ho defe stacg gat eur chaden
 Out ho habijou eur spilhen,
 Hac un arme a gant mil den
 A c'houlen cant mil spilhen.

An nadoz a zo demesell
 Ganet a lignès huell :
 Choant e defe da lavaret
 E ze qar taust da Bourbonet,
 Ha gouscoude e rancq goulen
 Sicour out becq eur spilhen.

Al labourer , ar p'ividicq,
 An artisan reuzeudicq ;
 Ar general er c'hombajou ,
 Ar roue e pen e stadou ;
 E peb afer e clasq peb den
 Tenna beguicg e spilhen.

Eur c'halvez a rayo eur c'har ,
 Eur c'hillorou , un alar ;
 Mæs evit ober eur spilhen
 E zeo ret caout tri zen :
 Meur a hini a zrep bara
 Ne ouzont qet an dra-mâ.

[8]

Unan a dailt hed ar spilhen,
 E eun hac e c'hempenn;
 Gat neud laiton en dro d'e sen
 Eun all a ra eur gurunen;
 Eun all out eur man bigolen
 A lemm beguioe ar spilhen.

Evel'ze en em sivuzen
 O rima var eur spilhen;
 Bevg e deus; guire, va spilhen,
 Maes n'e bico den bityigen;
 Vive eta evit biven,
 Vive beguioe va spilhen!

AI jpmomet, ar binividic
 Vu astresser le rlexendic;
 Ar genetivi et e'poumpation,
 Ar loze e beu e isthon;
EIN.
 Ic bep ast e clod daen
 Tanns pegnied e spilhen.

Er c'gaviez a tayo en e'per,
 Er c'gillotorn, nu s'ez;
 Mer e'vif oget en spilhen
 Bevo jef c'zout tu xou;
 Mer a pidi a xou p'ne
 Ne ouxot def au dis-tu.